

34

# Son ar Mere'hed pennou skanv

434

War eun Ton anavezet.

1

Eur zon zo nevez kompozet, pen-da-ben eo ar vrionez,  
Divar ben gizioù ar merc'het zo breman o koll ar furnez.

2

Breman siouaz ar merc'het keiz a zo vel pa vent dirollet  
Evidon-me a zonz noz deiz o deuz peb skiant vad kollet.

3

Sellit ouz ho gwiskamanchou pegen farsus int da velet  
Sonjit merc'hed eo ho kizioù invantet gant an droug-speret.

4

Gwelet e vez var kern ho fen eun tam dantelez o ficha  
Setu an doare diskempen o deuz evit en em goeffa.

5

Araok ma 'z eont da bourmen kalzig amzer vez tremenet  
O friza ho bleo er sklaseñ vit essa deseo ar voaset.

6

Ho bizachou vez goloet gant bleud euz a bep seurt liou,  
Ho figur oll zo peinturet betek memez ho muzellou.

7

Var ho diskoaz e vez ledet eur pikol aneval blevek,  
Eun dra spontuz eo da velet goest eo da sponta ar c'hezek.

8

Kalz anezo vez ho feultrin re zizolo da bep mare,  
Peadra a zo da ruzia pa veler merc'hed décolleté.

9

Eur goal ekzempl int da velet ker ber ma zeo ho robennou.  
En doare-ze c'houi o gwelo soun ho fen var ho veloioù.

10

Gwelet e vezont d'ar zulioù guisket vel maskaradennou.  
O vont etrezek an dansou memez epad an offisou.

11

Lezel a reont ar gousperou gant ar vall da vont da zansal,  
Ha ne deuont euz an ebatou nemet pa vezo noz tenval.

12

Breman e kavont re zister eur muzik hebken 'vit dansal,  
Kaout a rankont « bal musicien » goal ger e koust dezo fringal.

13

Ne zellont ket ouz dispignou evit mont a bell d'an dansou.  
Selaout-ta merc'hedigoù, kement-se zo sotonioù.

14

Kalz a ardou reont o dansal, eur vez eo gwelet anezo,  
Eur pas araok, eur pas adrenv, ar peza ra ar re vezo.

15

Potred yaouank ouz va zelaou m'o peuz c'hoant kaout guir  
N'ez it ket d'o ch'lask d'an dansou, eno neuz nemet flouchennou. [priejou]

16

Eno e kollont ho iec'hed e kreiz ar boultren ar falla,  
Eno e kollont ho feiz, kaera tenzor d'oa er bed-ma.

17

Eno e verzont ho ene evit eur blijadur diaoulek,  
Eno e teuont oll da veza merc'hed karet Paolik Korgnek.

18

Kement vis fall a hell beza a gavoç'h en eun danserez.  
He zi vo euz ar re loussa dre ma zeo eur feneantez.

19

M'ar d'oc'h gwir botred a zoare, o ! lezit an danserezet  
Ha choazit 'ta evit pried eur plac'hik yaouank fur meurbet.

20

Hag a veloc'h guisket kempen o vont d'ar zul d'an offisou.  
A selaou mouez he beleien o tec'het diouz an ebatou.

21

Echui a ran va c'hanaouen 'n eur bedi ar merc'hedigoù  
Da en em wiska kempennoc'h ha da zilezel an dansou.

Y. J.

(Tous droits réservés)